

# AN ALUZEN.

Deut eo an amzer rust; cetu ni er gouan ,  
 Amzer eûzus d'ar paour, a zouffr a bep seurt poan :  
 Ar glao, an erc'h, ar frim, ar scorn, pep fall amzer  
 A laqa an dud paour da zouffr horrupl mizer.  
 Ar paour, privet a dân, alies eus a voed  
 Dilouer ha divoutou, e gorf paour a voelet  
 Cazi oll dizolo; crena ra gant ar riou :  
 Ha c'houi ve cris avoalc'h d'en lezel mont abiou  
 Hep dont da rêi dezàn eun dra d'e zoulaji,  
 Pa expos dêc'h e boan e gichen dôr ho ty !

Sellit ar paour qez côs, gant e guchen blêo güenn,  
 Gant e zaoulagad trist, cazi marv en e benn !  
 Sellit ar vam dener, qer dign eus a drue,  
 O c'houlen eun tam boed evit e bugale;  
 Rac, daoust ma zeo-hi prest da vervel gant an naon,  
 N'e deus nep interest eviti : n'e deus aon  
 Nemet e teufe manq a voed d'e c'hrouadur :  
 Ze a rann e c'halon eus a zisplijadur.

Mar fell dêc'h gout petra e zeo ar baourente,  
 Hit, m'ho ped, christenien, hit, m'ho ped, hep dale  
 Da velet repu trist eur famill er vizer :  
 Eno eo e velot paourentez an dud qer.  
 Sellit var an douar, sellit piz trô-vardrô,  
 Na velot var bep den nemet liou ar maro.

Sellit en eur c'hoignic, var an douar calet,  
O crena gant ar rion eun den còs daou-bleguet ;  
Sellit c'hoas a gostez ar mab-caer eus an ty,  
Gant rustder an amzer e crèn e izili.  
Mes ar pezh zo goassoc'h, eo güelet ar vam guèz,  
Dizec'het he feultrin, hep eur strill banne lèz  
Da vezur e buguel!... O tourmant an natur!  
N'e deus nemet daelou da rèi d'e c'hrouadur.....  
Ar vugaligou guèz a gri : bara!... bara!...  
An tad paour maleürus a glasq, mes n'eus netra.  
An tad-còs, ar vam-gaer, ar vugale, ar vam,  
Allas! a rànc'o oll chom hep débri nep tam!  
Eun tam goulou roussin hepquen zo alumet,  
Mes ne zeus nep tam tån da domma en oalet.  
Qerqent m'eo commancet eun nebeudic an nòs,  
E za ar famill baour da glasq qemer repos ;  
A boan eus dindanne eur vojadic colo,  
Hac o fillou hepquen à zo eus o c'holo.

He bien-ta, christenien, ha c'houi a elfe chom  
Hep rèi sicour da dud o deus qer bras ezom ?  
Nan, nan, n'er c'hredàn qet, Bretonet generus :  
Ia, c'houi zicouro ho preudeur maleürus.  
Doue a lavar deomp dont da ober bepret  
Ar pezh a garfemp-ni ve grèt en hon andret.  
Greomp eta ar vad a ellomp da ober :  
Eun douçder vras eo ze, a dle deomp bea qer.  
Sicouromp-ta ar paour, herves m'hon eus moyen :  
Ze eo dever pep den en em zant guir gristen.  
Sicouromp ar beorien, ha bepret a propos,  
Rac arabat eo demp chom atao d'o c'hortos.

Sònjomp peguer poannius eo da dud delicat.  
Rêi da c'houzout d'an oll eo o mizer anat!  
Ret eo lacat eves da ober rusia den,  
Marteze drêr maleur forcet d'an aluzen,  
Roomp a greiz calon, pa ellimp rêi eun dra:  
Pep güir den generus velse atao er gra.  
Ar vad a rêr d'ar paour a blij calz da Zoue,  
Hac an hini er gra zo contant e ene.

Oh! ma carfet sònjal peguement voar eürus  
O tont da rêi sicour d'ar paour qèz maleürus,  
Gant pes hastidiguez e teufe pep christen  
Da ziredec gant joa da ober aluzen!

N'oc'h eus-hu qet santet avichou en ho creiz  
Eur joa douç, eur joa bur, pe en nòs, pe en deiz,  
Pa deue da zònj déc'h er fonç eus ho calon  
Eus eun action vad, dign a gristen güirion?  
Oh! ma n'oc'h eus biscoas santet eur seurt bonneur,  
Ma n'oc'h eus qet james sicouret ar maleur,  
Oh! hastit, me ho ped, da rêi an aluzen,  
Hac ec'h assuràn déc'h evit güir ha certain  
Eur joa eus ar vrassa neuze incontinant,  
Hac a rai d'ho calon beza meurbet contant.

Ne gredàn qet e ve ret qementse qelen  
D'am c'henvrois Breizis d'ober an aluzen:  
Ar Vretonet atao, ze n'eo qet ignoret,  
A gar, en peb amzer, ober ar vad bepret.  
Rac-se, va c'henvrois, bezomp oll generus,  
Dreist oll en amzer rust, d'ar paour qèz maleürus.

Truez vit an den còs, truez d'ar vam dener,  
Truez d'an tad, truez d'ar vugaligou guer!  
E maint etal ho têt o lavarar peden :  
Soulaïit o mizer d'ar beorien, christenien.  
En hano a Jesus, ganet paour en eur c'hraou,  
Bezit truez outo : manq ra dê an oll draou.

Roit, roit atao, hep lacat da c'hortos :  
An aluzen a zo eur joa a Varados.  
An dra-ze a laqa ar joa bars er galon,  
Hac a denn ouz Doue ar venediction.

Roit..... Ha pa deuyo an termen diveza  
Ma vezo ret neuze mont da apparissa  
Evit renta ar gont d'ar Barner Souveren,  
E lavararot : « Me meus soulajet ar beorien. »  
Ha Doue, dre m'ho po grêt vad var an douar,  
Ho recevo gant joa er pales eus e c'hloar.

A. LÉDAN.



---

E Montroulez, Imprimeri LÉDAN, e traon ru ar Vur.